

6

GUERZ TRUEZUZ

SANTIAGO

Var sujed an Drouc-eüriou c'hoarveet an eiz a viz
querzu er bla mil eiz cant tri a tri-uguent en
eun Iliz deus ar CHILI.

Var don : *Sur les bords de la Gironde.*

Anez ho sicour, ma Doue,
N'allin biquen discleria
Da G'hristenien ar vro-ma
Ar pezh a so em bolante,
Var sujed eun dra spontus.
So bet meurbed domajus !

An eizvet de a viz querzu,
Eiz cant tri a tri-uguent,
Evit rei scler da entent,
Ez eo bet croguet dious-tu
En eun ilis an tan goall
Hep ma zo den da damall.

Er guenta quer deus ar Chili
Zo hanvet Santiago,
En eun templ e oa var dro
Tri mil a dud dija arri
Da celebri a galon
Goël caër ar Conception.

Ar vro-ze zo en Americ,
Er c'hreiz de deus ar Pérou.
Touichet vo ar c'halonou
Dreist-oil ar re zo catholic,
Pa glevoint comz var ho hed
Deus ar pezh so c'hoarveet.

Estraincha destinadurez !
Ar gaz pini oa placet
Rez imaich Mamm mestr ar bed,
Izeloc'h vit treid ar Verc'hes,
A lausq an tan tro var dro
Er ridoziou, bannielou.

Sonjet oa da guenta gallout
Trechi var ar flammou-ze
Pere buan a nije
Dre an templ santel-ze partout.
Rencont 'ra siouas ! devi
En creiz ar forz hac ar gri !

An dud tosta d'an horojou
A allas achap hepquen ;
Neuse n'hem gavas souden
Mescq, prez, spont, leun a hirvoudou !
Eur vur veo a ampeiche
Ar sorti hac an antre.

En queid-ze an tan a rede
En eur feçon spouronnus ;
Stad ar bopl oa dangerus :
Divoall na mont quit na elle.
Red oa deza chomm eno
Dindan eur mor a flammou,

Guelet 'vije ar golou coar
O dévi a villerou,
Vel ar gaz bars al lampou
Dirollet er guiz d'eur gonnar !
Ar vur veo a chomm bepred
Er plaç ma vo distruijet.

An ilis ebars eun istand
A zo en fourniès rentet ;
Allas! mervel a vo red
D'ar foul oll en eun tan ardent,
Ha gant ar brassa glac'har
Oe bizcoaz var an douar !

Ar gri forz hac an hirvoudou
A save dalc'h mad ho mouëz ;
Ma Jesus, goassa nosvez !
Ranna a re ar c'halonou,
Faut na elle n'hem sicour
Na mignon nac adversour !

Cousgoude en danger bras-ze
Cals a zo bet courajus.
Pell deus beza diegus
O deveus riscqulet ho buez
Evit essa sauvetaat
Tud a oa quen trist ho stad !

Comz a rin deus eur c'havailher
Pehini zo deut a benn
Da denna seiz pe eiz den
Gant eul lazze pe cenclen lezr
Ous he zibr a divilhe
P'hen taul en creiz an templ-ze.

Deus a vescq ar foul e tenn c'hoas
Eun toullad corfou blonset
Pere oa moyen bepred,
Daoust d'ho oll spont ha d'ho gloas
Deze da chomm en buez
Gant caout sourci aneze.

Quen stanc e tal an horojou
Oa ar bopl paour dastumet
Bern var vern vel amarret
Ma diframme leun a vemprou
Pa c'hoantet a diavez
Dont da saicha an dud quez !

Quer buan evel al luhed
E vale an tan traytour
Ma n'hem gav vén pep sicour
En eur vro 're nebeud abred,
Bars ar seurt occasion,
Da rei eun taul dorn guirion.

Dindan ugent minut a boan
Eo tavet mic ar c'hlemmou ;
Mougued eo an oll flammou ;
Na veler na mogued na tan.
Eur c'hanv a dristidiguez
Hepquen a sav prest he vouez.

Ouspenn daou vil a rencq mervel
En eur goal quen spouronnu ;
O tra meurbed glac'harus !
Graç maz aint d'ar joa eternal !
An darn vuia aneze
Oa graguez ha bugale.

Piou na vo he galon frommet
O clevet guevier eüzus
Forjet dre scrijou flemmus
Evel bars an ifern trempet
E enep ar veleyen
Hac ar guella c'hristenien ?

Bro-Saus, Franç hac an Americ
A doug ar c'heloyou-ze :
Mezus eo comz aneze
Dreist-oll er broyou catholic.
Mæs a vizcoaz an dud fall
A glascq tamall ar re all.

Yonquet peos o deus credet
Pep na resped ha hep mez
Pont da accus graguez quez
Assablès gant ho fastored
Ha veza dre ho c'hrimou
Bet caus d'ar seurt malheuriou ?

Eur blam deus eun hevelep pouëz
A so faus, dre c'hraç Doue !
Me hen tou dirac an Ee,
Hac hen assur gant guiegnéz !
Na mouëz a savan hirie
Vit difenn ar virionez.

Ministred Jesus, a hend all,
Zo ive divlam meurbed ;
Rac ho fossupl a deus gret
Vit sicour moug an tan goal
Ha scuill don en pep calon
Dre oll consolation.

Perac eta ho accusi
En eur feçon quen grevus
Ha tevel var dreon euzus
So gret gant marc'hadourien gris
Deus Bro-Saus, bars ar Japon,
Hep na sujed na rêson ?

Eur guer a seiz uguent mil den
O deus en ludu rentet ;
Rez tregont mil zo collet
Er boan hac er brassa anquen !
C'hoas na gred pluen ebed,
Discleria ho c'hrueldet !


Tud just n'hem gonsolet bepred ;
Doue eun de ho paëo ;
Nerz an ifern a goëo,
Daoust peguemend eo connaret !
Sent hac Elez bars ar gloar
A gano crên ho victoar.



5 bis

KANTIK

SANT ERVOAN



Ton : *Goude bean communiel, pe, Zantez Anna.*

DISKAN : Otro zant Ervoan vinniget,
D'hon ine goulet graso,
Digant Doue c'hoaz goulennet
D'hon douar gliz an Envo.

Dimeus an otro zant Ervoan
Diskleriomp ar burzudo :
Meurbet anaoudek peb-unan
A greiz kalon a laro :

Hon mam, kent evit hon genel,
D'ar zant-man d'oa hon gwestlet :
Diboaniet, joaus, he bugel
D'ar zant e deus digaset.

D'an den iaouank en he studi,
O pidi en he chapel,
A n'eus laret : lak ta zoursi
Ma vi eur belek zantel.

Ia, gwir eo eta ; zant Ervoan,
Goude bizit ha peden,
Vit stad buez, da beb-unan
Bepret a ro sklerijen.

Hag a wech, hô tra burzudus !
Hon douar oll skarinet,
Gand eur glao meurbet talvoudus,
He a neus bet distanet.

Pegen liez c'hoaz, hon parko
Gand an dour evel beuet,
Deus he c'halloud kaëran merko !
He a neus bet dizec'het.

Dimeus ar paour gwasket ar c'hlem
Gant-han zo bepret kleoet :
Ha gand nerz he speret ken lem,
Ar gwasker a zo trec'het.

Bezant eo, hep mar, zant Ervoan
Ar gwir skoër ar Veleien,
Difen ha nerz an dud a boan
Ha kuzul tud a lezen.

Deus a ben pellan Breiz-Izel
Ar beajour souezet,
A len, en Rom, oar eur chapel,
Zant Ervoan ar Vretonet.

Meurbet karet gand hon tado
Ni hen karo n'hon buez :
Ha kent hen meuli en Envo
Ni laro liez bemdez.